




ken vreuriez AR BREZONEG

KAIEROU KENVREURIEZ ar BREZONEG

T A O L E N N an N I V E R E N N 32

oo

1. an overennou e brezoneg e eskopti Kemper ha Leon
2. an Nouenn - Lennadennoù (kendalh).....13/71
3. pedennoù da lavared dirag eur hristen war e dremenvan....42/100

oo

Evid kaoud:

Kaierou Kenvreuriez ar Brezoneg.....20 lur (5 niverenn)
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr T.....30 lur
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr B.....20 lur
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr C.....20 lur
AR BRIEDELEZ.....8 lur
AN NOUENN.....8 lur
LEVR AN OVERENN (embannadur nevez)
o goulenn digand JOB SEITE - skol-an-aod - 29249 Guissény

C.C.P. 1738.46 Rennes

Troidigezioù aotreet da arnod
evid an eskopti a-berz an Aotrou
F.Barbu, eskob Kemper ha Leon
Kemper d'an 19 a viz mae 1974
Visant Fave, eskob-skoazeller

AN OVERENNOU E BREZONEG EN ESKOBTI KEMPER HA LEON

Overennou-radio (Pask,Pantekost,Hanter-Eost)

E BRO-LEON : Plouzane,Plouarzel, Lokornan-Leon,Gwitalmeze,Lambaol-Gwitalmeze,Lanniliz,Plougernev(3 gwech),Gwiseni,Kerlouan,Brignogan,Plouneour-Trêz,Kernouez,Ar Grouaneg,Ar Folgoad(2 wech),Sant-Neven,Sant-Divi;Gwikar,Sant Nougga,Kleder,Plougoulm,Plouenan,Landivizio,Sizun,Ar Releg(Plouneour-Menez),Plougastel-Daoulas,Gwinevez.

E BRO GERNEV : Skrignag,Plouye,Kastell-Nevez ar Faou,Leuhan,Landelo,Erdern,Abati Landevenneg,Lokronan-Kernev,Mahalon,Poulgoazeg,Landudeg,Kerrien (Hanter-Eost 1973)

E BRO-DREGER : Plouyann,Plougonven,Gwerliskin.

Ar parrezioù euz Eskobti Kemper o-defe c'hoand kaoud an overenn-radio e brezneg,da Bask,d'ar Pantekost,pe da Hanter-Eost,n'o-deus nemed skriva da JOB SEITE,SKOL AN AOD,GWISENI.Ne vez roet nemed d'ar parrezioù hag o-defe bet dija araog da vianna un overenn-parrez e brezoneg

PARREZIOU HAG O-DEUS BET OVERENNOU E BREZONEG: Sant Martin,Brest,beb pemzeg devez,la ha trede sul ar miz.Sant Kaourintin Kemper,beb miz d'ar zul kenta.Rumengol,beb miz d'ar zul diweza ha beb sul a viz mae,Nizoneur wech beb daou viz,Sant Martin Brest,c'hoaz evid ar yaouankizou hanter-halleg,hag hanter-vrezoneg,beb miz,Gwiseni,eur wech ar miz.

PARREZIOU ALL a zo hag o-deus bet da vianna eur wech ha lod anezho o-devez eur wech an amzer:Loctudi,Dirinon,Ar Forest-Landerneve,Loperhet,hanvec,Rosnoen,An Ospital-Kamfroud,Ar Faou,ar Roh,Sant-Neven,Lesneven,Ospital Lesneven,Plouzeniel,Kerniliz,Koad-Meal,Gwipronvel,Ar Vourc'h-Wenn,Plougin,Lamber,Kastellin,L'Ogonna-Kimerh,Landevenneg,Plomodiern,Braspartz,Gouezeg,Ar Salet (Montroulez),Sant-Tegonneg(chapel Santez Berhed)Lok-Melar,Sant-Kadou,Ploueskad,Ospital Ploueskad,Enez Eussa.

Setu aze 80 parrez hag o-deus bet overennou e brezoneg,ha c'hoaz ez eus re all moarvat ha n'int ket bet menveget amañ.Layarom dioustu e plij kenañ d'an dud al lidou e brezoneg.Sacha a reont beteg an hanter muioh a dud eged an overennou all.Amañ hag ahont eo kroget ar hleñved ivez e-touez ar yaouankizou,pa welom eo ken stank e lod parrezioù ar re yaouank hag o-deus dilezet an overenn da zul.

SAKRAMANT AN NOUENN a zo bet roet e brezoneg e ospital Lesneven da veur a hini asamblez.KENVREURIEZ AR BREZONEG he-deus embannet kement a zo red evid rei Sakramant an Nouenn e brezoneg.Goulenn digand Job Seite.

K. ar B. 1974

Spered Doue a zo warnon.

Izaiaz a dro e zaoulagad warzu ar Mesiaz da zond, gantañ ar helou mad evid an dud gwasket e doare pe zoare. (Iz. 61/I-3a, 6a, 8b-9)
Ar pennad-mañ a lenno Jezuz e sinagog Nazared (Luk. 4/I?)

1. Spered Doue a zo warnon,
rag m'e-neus an Aotrou va zakret gand an oleo.
Kaset e-neus ahanon da rei da anacud ar helou mad
d'an dud keiz,
da frealzi an dud doaniet o halon,
da rei da houzoud d'ar brizonidi ez int libr,
ha d'ar re zall e teuo dezo ar gweled,
2. da embann eur bloavez a vadelez a-berz Doue
hag eun devez a veñjañs evid on Aotrou,
ha frealzi ar re oll a zo doaniet.
3. E-leh ludu ar binijenn,
e lakin war o fenn eur gurunenn a roue;
e kañv edont hag e lakin war o fenn,
eoul-c'houez-vad, mammenn a joa;
kollet o-doa peb fiziañs
hag e roin dezo dillad-gouel.
- 6a Ha c'hwi a vo anvet "beleien an Aotrou",
roet e vo dech an anv a "zervicherien on Doue".
- 8b Rei a rin dech an digoll prometet,
hag eun emgleo peurbaduz a skoulmin ganeeh.
9. Ho tud war ho lerc'h a vo brudet e-touez ar broadou,
ha tud da zond ho lignez e-touez ar poblou.
Kement hini o gwelo a welo ez int eur ouenn dud
benniget gand an Aotrou.

Holenn an douar....sklerijenn ar béd

Sammet gand ar hleñved pe ar gozni, e hellom c'hoaz, dre or feiz,
beza evid ar re on darempred, nerz ha sklerijenn. Selaouom or Zal-
ver e Aviel Sant. Vaze 5/I 3-16.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant vase.

13. Jezuz a lavaras d'e ziskibien:
- C'hwi a zo holenn an douar;
med ma teu an holenn da goll e vlaz,
gand peotra e vezo roet dezañ e zaour?
N'eo mui mad da netra,
nemed da veza taolet er mēz ha breset gand an treid.
14. C'hwi a zo sklerijenn ar béd;
eur gêr savet war lein eur menez n'heil ket beza kuzet.

15. Ne vez ket enaouet eur goulou,
 evid hen lakad dindan eur boezeli.
 Lakeet e vez war eur hantolor hag e sked neuze,
 evid ma roio sklerijenn d'ar re oll a zo en ti.

16. Evel-se ho sklerijenn a skedo dirag an dud,
 hag e welint ar vad a rit;
 ar re-mañ a rento gloar d'ho Tad a zo en Neñv.

7 bis

Eüruz!...Eüruz...!

E peleh ema ar gwir eürusted ? Selaouom Jezuz ! Vaze 5/I-I2

1. En amzer-se, o weled pegement a dud a oa,
 Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;
 mond a ra d'azeza, hag e ziskibien a dosta outañ.
2. Kregi a ra (staga 'ra...) da gelenn anezo, o lavared kement-mañ:
3. - Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo Rouantelez an Neñvou.
4. Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet
 a hounezint.
5. Eüruz ar re o deus da ouela, rag frealzet e vezint.
6. Eüruz ar re o deus naon ha sehed euz servij Doue,
 rag o gwalh a vo roet dezo.
7. Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.
8. Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.
9. Eüruz ar re a labour evid ar peoh,
 rag anvet e vint bugale da Zoue.
10. Eüruz ar re o deus da houzañv ablamour da zervij Doue,
 rag dezo eo Rouantelez an Neñvou.
11. Eüruz oh-c'hwil, pa daolo an dud dismegañs warnoh,
 pa raint brezel deoh,
 pa lavarint e gaou beb seurd droug eneb deoh,
 ablamour din-me:
12. Bezit laouen ha tridit gand ar joa,
 rag digoll kaer ho peus da gaoud en Neñvou.

8

Doue a zo mestr war ar yehed hag ar hleñved,
 war ar vuez ha war ar maro.

Jezuz a ro ar pare d'an den lovr ha da zervicher ar hantener.

Aviel Jezuz Krist, hervez Sant Vaze. 8/I-17

1. Diskennet Jezuz diwar ar menez,

EZ EAS eur bobl vraz a dud d'e heul.

2. Ha setu eun dén lovr, o veza tosteet, a stouas dirazañ,
hag a lavaras:
- Aotrou, ma karit e hellit va farea.
3. Jezuz, oh astenn e zorn, a douchas outañ en eur lavared:
- Me a fell din, bez pareet !
Ha kerkent e oe pareet euz e lorgnez.
4. Hag e lavaras Jezuz dezañ:
- Taol evez na lavarfes netra da zén,
med kae d'en em ziskouez d'ar beleg,
ha kinnig ar prov gourhemennet gand Moizez,
ma talvezo kement-se evito da gred.
5. O veza m'edo Jezuz oh antreal e Kafarnaum,
e teuas davetañ eur hantener
hag a reas outan ar bedenn-mañ:
6. - Aotrou, va zervicher a zo war e wele, em zi, seizet e izili,
ha diwaska a ra poaniou kriz.
7. Jezuz a lavaras dezañ:
- Mond a rin hag e parein anezañ !
8. Ar hantener a respontas:
- Aotrou, n'on ket din e teufeh em zi,
med lavarit eur gêr hebken hag e vo pare va zervicher,
9. rag me a zo dindan galloud ar re all,
hag am-eus soudarded dindannon
hag e lavaran da unan mond hag ez a,
da unan all: dond, hag e teu,
d'am zervicher: ober an dra-mañ, hag e ra.
10. O klevet kement-se, e oe Jezuz estlammet,
hag e lavaras d'ar re a oa ouz e heul:
- E gwirionez, me'lavar deoh, n'em-eus ket kavet
eur seurd feiz e Israel,
11. ha lavared a ran deoh,
e teuo kalz tud euz ar Zav-Heol hag euz ar Huz-Heol,
hag a gemero plas ouz taol gand Abraham, Izaag, ha Jakob,
e Rouantelez an Neñvou,
12. e-keid ha ma vo bugale ar Rouantelez,
taolet er mêz, en deñvalijenn,
en e vo daelou ha skrignadeg dent.
13. Neuze e lavaras Jezuz d'ar hantener:
- Kae ha ra vo greet dit hervez da feiz!
D'an eur-se endeeun e oe pareet e zervicher.
14. Jezuz a zeuas neuze da di Bêr
hag a gavas mamm-gaer hemañ war he gwele
gand an derzienn.
15. Touch e reas ouz he dorn,
hag ez eas an derzienn diouti;
sevel a reas raktal hag e serviche anezo.
16. Deuet an abardaez-noz e oe digaset dezañ
kalz tud hag a oa dindan galloud an droug-spered.
Kas a reas ar sperejou kuit gand eur gêr,
hag e pareas an oll glañvourien.
17. Evid ma teufe da wir komz ar profed Izaiaz:
- Kemeret e-neus warnañ e-unan or zempladurez,
ha sammet or hleñvejou.

Deuit davedon, c'hwi oll hag a zo sammet

Kaled eo buez an dñn war an douar. Deom daved Jezuz; Eñ or frealzo hag or hennerzo.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze

11/25-30

25. Jezuz a zavas e vouez hag a lavaras:
- Ho meuli a ran, Tad, Mestr an Neñv hag an douar,
o vezañ m'hoh-eus kuzet an traou-se ouz an dud fur
hag an dud skianteg hag o diskuillet d'ar re vian.
26. Ya, Tad, rag evel-se eo bet plijet deoh.
27. Peb tra a zo bet lakeet etre va daouarn gand va Zad
ha dñn ebed ne anavez an Tad nemet ar Mab,
hag an hini a fell d'ar Mab hen diskulia dezañ
28. Deuit davedon, c'hwi oll hag a zo skuiz
hag a bleg dindan ar zamm
ha me a lamo ar beh diwarnoh.
Kemerit warnoh va yeo.
29. Ha deuit d'ar skol ganin, rag me a zo dous hag izel a galon
hag e kavoh an diskuiz.
30. Ya, va yeo zo êz da zougen
ha va zamm a zo skañv.

Dond da veza heñvel ouz bugaligou

Ar hleñved a ro deom distrei on daoulagad diouz an traou didalvez,
dond da veza heñvel ouz bugale dirag ar bñl o trei. D'ar vugale ha
d'ar re a zo heñvel outo e vo Rouantelez an Neñv.

Aviel or Zalver Jezuz Krist hervez Sant Vaze.

18/1-5, 10

1. Eun devez, e tostas an diskib en ouz Jezuz
hag e lavarjont dezañ:
- Piou eta eo ar brasa e Rouantelez an Neñvou?
2. Jezuz, o helver davetañ eur hrouadur,
a lakañ anezañ en o hreiz
hag a lavaras dezo:
3. - E gwirionez, me a lavar deoh, ma ne jenchit ket
ha ma ne deuit ket da veza heñvel ouz bugale vian,
ne 'z eoh ket e Rouantelez an Neñvou.
4. An hini en em izelaio evel ar bugel-mañ
a zo ar brasa e Rouantelez an Neñvou.

5. Hag an hini a zigemer em ano eur bugelig evel hemañ,
me va-unan eo a zigemer.
10. Diwallit da zisprizoud nikun euz ar re vian-mañ,
rag me a lavar deoh, o êlez en Neñvou
a wel heb ehan dremm va Zad a zo en Neñvou.

II

Micherourien an unnegved eur

Doue a ro beb-hini hervez e vadelez.
Bezom atao fiziañs e madelez Doue.
Selaouom an

Aviel hervez Sant Vaze.

20/1-16

1. Heñvel eo - eme Jezuz -
Rouantelez an Neñvou ouz eur penn-tiegez,
hag a zo eet er mêz kerkent ha tarz an deiz,
da hopra labourerien evid e winieg.
2. Marhad a reas ganto evid eun diner, an devez
hag e kasas anezo d'e winieg.
3. Eet er mêz war-dro nav eur diouz ar mintin,
e welas ar re all aze war ar blasenn, dilabour.
Ha dezo e lavaras:
- Kit, c'hwi ivez, d'am gwinieg,
hag e roin deoh ar pezh a zo just.
Hag ez-ajont.
5. Deuet adarre er mêz war-dro kreizteiz,
ha war-dro teir eur goude kreizteiz,
e reas ar memez tra.
6. War-dro pemp eur, e teuas c'hoaz er mêz,
hag e kavas re all eno ha dezo e lavaras:
- Perag ez oh chomet aze, epad an deiz, dilabour ?
7. Hag int-i da respont dezañ:
- N'eus den ebet ouz or gopra !
Hag e lavaras dezo:
- Kit, c'hwi ivez, d'am gwinieg!
8. Pa oe deuet an abardaez, e lavaras mestr ar winieg d'e verour:
- Galv al labourerien ha ro dezo o fae,
en eur vond euz ar re ziweza d'ar re genta.
9. Pa zeuas ar
ar re a oa kroget da labourad war-dro pemp eur,
e resevjont beb a ziner.
10. Pa zeuas tro ar re genta, e soñje d'ar re-mañ kaoud muioh,
med reseo a rejont int-i ivez peb a ziner.
11. En eur reseo o fae, e hrozmolent a-eneb mestr an tiegez,
en eur lavared:
- Ar re-mañ, digouezet da ziweza
n'o-deus greet nemed eun eurvez-labour,

12. ha padal int lakeet ganeoh keid-ha-keid ganeom-ni,
hag on-neus gouzañvet pouez an deiz hag herrder an heol.
13. Armestr a respontad da unan anezo:
- Va mignon, ne ran ket a haou ouzit,
daoust ha n'eo ket evid eun diner
eo ho-poa greet marhad ganin ?
14. Kemer ar pez a zo dit ha kerz d'ar gêr.
Felloud a ra din rei d'an diweza kement ha dit.
15. Daoust ha ne hellan ket ober ar pez a fell din gand va feadra ?
Perag ez eus gwarizi en da galon,
ablamour ma 'z on mad ?
- 16a. Evel-se ar re ziweza a vo ar re genta,
hag ar re genta a vo ar re ziweza.

12

an talañchou.

Doae a lavaro d'ar servicher mad: "Deus da gemer perz
e levenez da vestr.

Aviel or Zalver Jezuz Krist hervez Sant Vaze. 25/14-23

14. Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez.
Lavared a reas ar barabolenn-mañ:
Un dén, o vond da bell bro
a halvas davetañ e zervicherien,
hag e fizias enno e vadou.
15. Da unan e reas pemp talant, da unan all daou,
ha da unan all unan,
da beb hini hervez ar gouest ma oa.
Hag ez eas kuit.
16. Raktal an hini e-noa resevet pemp talant
a yeas d'e lakaad da dalvezoud
hag a hounezas pemp all.
17. En heveleb doare, an hini e-noa bet daou dalant
a hounezas daou all.
18. Med an hini n'e-noa nemed unan
a yeas d'ober eun toull en douar
hag a guzas ennañ arhant e vestr.
19. Pell amzer goude e teu endro mestr ar zervicherien
hag e reas e goñchou ganto.
20. An hini e-noa bet pemp talant a dosteas
hag a zigasas pemp talant all ouspenn,
en eur lavared:
- Mestr, pemp talant az-pca fiziet ennon,
setu pemp all am-eus gounezet.
21. Lavared a reas dezañ e vestr:
- A zo mad tre ! Servicher mad ha feal !
Feal out bet war nebeud a dra,
fizioud a rin kalz ennout.
Deus da gemer perz e levenez da vestr.

22. An hini e-noa bet daou dalant a dosteas ivez
hag a lavaras:
- Mestr, daou dalant az-poa fiziet ennon;
setu daou all gounezet ganin.
23. Lavared a reas dezañ e vestr:
- A zo mad tre ! Servicher mad ha feal !
Feal out bet war nebeud a dra;
fizioud a rin kalz ennout.
Deus da gemer perz
e levenez da vestr !

I 3

Jezuz a bardon ar pehejou.

Rei a ro ar pare d'ar re glañv ha peoh o ene d'ar beherien.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark. 2/1-12

1. Jezuz a oa distro da Gafarnaum.
2. Pa oe klevet edo er gêr, e tiredas kement a dud
ma ne oa ket a blas dezo, dirag an nor zoken.
Prezeg a ra dezo ar Gomz.
3. Setu ma oa digaset dirazañ eun dén seizet e izili
douget gand pevar dén.
O veza ma n'hellent ket tostaad outañ ablamour d'an engroez,
e reont eun toull en doenn azioh al leh m'edo,
ha goude-se e tiskennont dre an toull ar hravaz,
ma oa astennet warni an dén seizet.
5. Jezuz o weled o feiz a lavar d'an dén seizet:
- Va mab, da behejou a zo pardonet dit.
6. Hogen bez e oa eno etouez an dud
a oa war al leh eun nebeud skribed,
hag a lavare enno o-unan:
7. - Penaoz e hell an dén-ze komz evel ma 'ra ?
Blasfemi a ra.
Piou a hel; pardonî ar pehejou nemed Doue hebken ?
8. Jezuz o lenn dioustu en o spered, a lavaras dezo:
9. - Perag e vagit seurt soñjou en ho kalon ?
Petra eo an êsa da ober ?
Lavared d'eun dén seizet: " Da behejou a zo pardonet dit."
pe lavared: " Sav en da-zav, kemer da hravaz ha kerz ?"
10. Mad ! Evid ma ouezot e-neus Mab an dén ar galloud
da bardoni ar pehejou war an douar,
11. me a ro urz dit, emezañ d'an dén seizet,
sav en da-zav, kemer da hravaz ha kae d'ar gêr.
12. An dén a zavas en e zav,
a gemeras kerkent e hravaz
hag a yeas er mêz a wel d'an oll,
ma oe ar bobl a-bez estlammet
ha ma rentent gloar da Zoue, en eur lavared:
- Biskoaz n'on-eus gweled kemend-all !"

I4

An avel hag ar mor a zent ouz Jezuz

Perag kaoud aon ? Doue a veill warnom.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark. 4/3 5-41

35. En deiz-se, deuet ar pardaez-noz, Jezuz a lavar d'e ziskibien:
- Treizom da vond en tu all.
36. Goude beza tehet diouz ar bobl,
e kemeront anezañ evel m'edo, da vond ganto er vag;
ha bez 'e oa bagou all d'e heul.
37. Eur barrad avel diroll a zav;
an tarzou a lamme ervad, beteg he harga.
38. Edo Jezuz e penn a-dreñv ar vag, kousket war an dorchenn;
mond a reont d'e zihuni, en eur lavared dezañ:
- Mestr, ha n'oh ket chalet ganeom,
p'emaom o vond da goll ?
39. Eur wech dihunet, e ra gourdrourz d'an avel,
hag e lavar d'ar mor:
- Chom sioul ! Ro peoh !
Ha setu torret war an avel, ha peoh kaer o rén.
40. Lavared a ra Jezuz dezo:
- Perag oh spontig evelse ?
Penaos n'ho-peus ket a feiz ?
41. Kroget aon braz enno,
e lavaront d'an eil d'egile:
- Piou 'ta eo hemañ,
pa zent outañ koulz an avel hag ar mor ?

I5

Aotrou, grit din gweled!

An Aotrou Krist a dremen awechou war an hent,
e-kreiz ol levenez, awechou all da vare eur hleñved...
Aliez n'her gwelom ket.
Goulennom digantañ digeri deom on daoulagad.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark. 10/46-52

46. En amzer-se, edo Jezuz o tond er-mêz euz kêr Jeriko,
e ziskibien ouz e heul, gand eur boblañ stank a dud.
E kostez an hent, e oa azezet mab Time, Bar-Time,
eun den dall o houlenn aluzen.
47. P'e-neus klevet ema aze Jezuz a Nazared,
e stag da hopal (pe: DA GRIAL A-BOUEZ-PENN):

- Mab David, Jezuz, ho pet truez ouzin !

48. Kalz tud a ra gourdrour dezañ (pe:A FOLL WARNAN)

evit e lakaad da rei peoh;

padal, (pe:MED)en ne ree nemed sevel uhelloc'h e vouez:

- Mab David, ho pet truez ouzin !

49. O veza chomet a-zav, Jezuz a lavar:

- Galvit anezañ da zond !

Setu an dud a halv an hini dall, en eur lavared:

- Kemer fiziañs, sav, galvet out gantañ.

50. An dén a daol kuit e vantell,

hag en eul lamm e teu da gaoud Jezuz.

51. Jezuz a houlenn outañ:

- Petra fell dit a rafen evidout ?

- Rabbouni, emezañ, grit din gweled.

52. Jezuz, neuze, a lavar dezañ:

- Kê ! gand da feiz out salvet!

Raktal e kav en-dro ar gweled,

hag ez a da heul Jezuz war an hent.

I6

Pasion or Zalver:

Jezuz en e agoni.

Aon hag anken a grog e Jezuz dirag ar maro

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark

Mark I4/ 32-42

32. Digouezoud a reont en eul leh anvet Jetsemani.

Jezuz a lavar d'e ziskibien:

- Azezit amañ, epad ma vin o pedi.

33. Kas a ra gantañ Per, Jakez ha Yann,

hag e teu da goueza warnañ spont hag anken.

34. Lavared a ra dezo:

- Trist da vervel eo va ene;

chomit amañ ha beillit.

35. Eet un tammig pelloh, e kouez d'an douar;

goulenn a ra en e bedenn

pellaad dioutañ an eur-se, ma hell beza pelleet.

36. Lavared a ra:

- Abba ! Tad ! C'hwi a hell peb tra:

pellait diouzin

ar halirad-mañ; evelato, ra vo grêt ho polontez-c'hwi,

nann va hini.

37. Dond a ra en-dro, hag e kav e ziskibien kousket.

Lavared a ra da Ber:

- Simon, kousket a rez ? N'ah eus ket gellet beilla eun eur zokén?

Beillit ha pedit, evid diwall da goueza en tentadur;

ar spered a zo prim, med natur an dén a zo gwan.

39. Pellaad a ra adarre ha pedi gand an heveleb komzou.
40. Pa zistro d'o haoud, e kav anezo kousket c'hoaz,
rag pounner e oa eet o daoulagad,
ha ne ouient ket petra da respont dezañ.
41. Evid an-trede gwech e teu evelse, hag e lavar dezo:
- Kouskit bremañ ha diskuizit ! Awal eo !
Deuet eo an eur !
Ema Mab an den o vond da goueza etre daouarn ar beherien.
42. Savit ! Deom ! An hini, 'zo ouz va gwerza a zo o tont.

17

Pasion er Zalver. Jezuz a varv war ar groaz.

Evidom-ni, beherien, eo e ro e vuez.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark. 15/25-37

25. Nav eur e oa, p'o-deus e staget ouz ar groaz.
26. Ar skritell a verke perag eo bet kondaonet a oa merket warni
ar geriou-mañ: Roue ar Juevien.
27. War eun dro gantañ, e lakont e kroaz daou laer,
unan a zeou hag egile a gleiz dezañ.
28. Evelse e teue da wir komzou ar Skritur Zakr:
" E renk an dorfetourien eo bet laketañ."
29. An dreminidi a daole outañ gwall gomzou,
o heja o fenn hag o lavared:
- Aha! te eo a ziskar an Temp!
hag a zav anezañ en-dro dindan tri devez!
30. En em zavete da-unan, diskenn euz ar groaz!
31. Ar veleien vraz ive kenetrezo gand ar skribed
a hoarze goap hag a lavare:
- Re all e-neus saveteet,
ha n'eo ket evid en em zavetei e-unan !
32. Eñ ar Mesiaz, roue Israel !
Ra ziskenn bremañ euz ar groaz,
ma welim ha ma kredim.
Beteg ar re 'oa staget ouz ar groaz en e gichen
a zistage outañ gwall gomzou..
33. Deut an eur a greisteiz, an denvalijenn a gouez
hag a holo an douar a-bêz beteg teir eur.
34. Da deir eur, Jezuz a daol eur griadenn gand eur vouez kreñv:
- Eloï, Eloï, lama sabaktani ?
da lavared eo: Va Doue, va Doue, perag ho peus va dilezet ?
35. Lod euz ar re 'zo en-dro dezañ a lavar ouz e glevet:
- Setu ema o hervel Eliaz.
36. Redeg a ra unan anezo da zouba eur spoueen er gwin treñk,
hag e sav anezi war veg eur gorzenn evid rei dezañ da eva,
en eur lavared: " Lezit 'ta, gwelom hag-eñ e teulo Eliaz d'e zistaga."
37. Med Jezuz, goude beza taolet eur griadenn vraz,
a zo tremenet.

Barabaz pe Jezuz.

Pilad gand aon rag ar bobl a lez ganto Jezuz.

Avia! Jezuz Krist hervez Sant Mark. 15/1-15

1. Abred diouz ar mintin, e ra ar veleien vraz
boda re goz ar bobl hag ar skribed gand ar HUZul-Meur a-béz;
goude beza lakeet chadenna Jezuz,
e kasont anezañ da di Pilat, ar gouarnour.
2. Goulenn a ra Pilat outañ: "Ha bez 'ch-c'hwil Roue ar Juzevien ?
Respont a ra Jezuz: "C'hwil eo hen lavar."
3. Tamallou en e eneb a zav ar veleien vraz bern war vern.
4. Pilat a houlenn outañ adarre: "N'ho-peus netra da respont ?"
Sellit pegén braz tamallou a daolont warnoh."
5. Med Jezuz ne respont mui netra,
ar pezañ laka Pilat da zouezi.
6. Hogen da gêver gouel Pask, e oa ar hiz gantañ
rei dezo frankiz eur prizonize, an hini a houlennent.
7. Bez 'e oa neuze an hini anver Barrabaz,
dalhet er chadennou a-unan gand ar re o-doa grêt eun taol dispah
ha lazet eun dén epad an dispah-se.
8. Pignet beteg ennañ, ar bobl a houlenn digand Pilat
ar pezañ a oa kustum da rei dezo.
9. Pilat a respont dezo:
- Ha c'hoant ho-peus e laosken ganeoh Roue ar Juzevien ?
10. Gouzoud a ree trawalh e oa dre warizi
o-doa ar veleien vraz laketa Jezuz etre e zaouarn.
11. Med ar veleien vraz a boulz ar bobl da houlenn digand Pilat
ar pezañ a oa kustum da rei dezo.
12. Pilat a
- zav e vouez en-dro hag a lavar dezo:
- Petra 'rin neuze euz an hini a anvit Roue ar Juzevien ?
13. A-bouez or fenn e respontont:
- Stagit anezañ ouz ar groaz !
14. Ha Pilat:
- Peseurd droug e-neus grêt eta ?
Krenvoh c'hoaz e youh an dud:
- Stagit anezañ ouz ar groaz !
15. Pilat, neuze, c'hoant dezañ plijoud d'ar bobl, a laosk ganto Barabaz;
ober a ra skourjeza Jezuz,
hag e lezel ganto da veza lakeet er groaz.

Pedenn ar Werhez.

C'hweg eo d'an dēn, ha goude ma ve er boan hag en drubuill
kana ar magnificat, gand ar Werhez vari, Mamm da Zoue hag or mamm.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz 1/46-55

46. Ha Mari, d'he zro, a lavar:
- Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou,
47. ha tridal a ra va spered gand Doue, va Zalver,
48. ablamour m'e-neus taolet e zellou war e zervicherez dister.
Ya, diwar vremañ an oll dud, a rumm da rumm,
a lavaro ez on eüruz:
49. ken kaer traou e-neus grêt evidon
an hini 'zo braz e halloud ha santel e ano,
50. hag a skuill e vadelez, a rumm da rumm, war an dud a zouj anezañ.
51. Dispaka 'ra nerz e vreh: skuba an dud leun o halon a vrasoni,
52. diskar ar rouaned diwar o zron hag uhellaad an dud izel;
53. ar re binvidig a gas kuit heb netra.
54. E skoazell a ro da Israel, e zervicher,
rag ne zizoñj ket e vadelez,
55. evel m'e-neus bet lavaret d'on tadou,
e keñver Abraham hag e lignez da viken.

Beza eüruz...

O klask beza eüruz emæom, med petra eo beza eüruz e gwirionez,
eüruz hervez furnez an Aviel.
Selaoucm petra 'lavar Sant Vaze.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. 5/1-12

1. En amzer-se, o weled pegement a dud a oa,
Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;
mond a ra d' azeza, hag e ziskibien a dosta outañ.
2. Kregi a ra (STAGA 'RA) da gelenn anezo,
o lavared kement-mañ:
3. - Eüruz ar re 'zo pabur a galon,
rag dezo eo Rouantelez an Neñvou.
4. Eüruz ar re 'zo leun a zouster,
rag an douar prometet a hounezint.

5. Eüruz ar re o-deus da ouela,rag frealzet e vezint.
6. Eüruz ar re o-deus naon ha sehed
euz servij Doue,rag o gwalh a vo roet dezo.
7. Eüruz ar re 'zo trugarezuz,rag d'o zro e kavint trugarez.
8. Eüruz ar re 'zo glan a galon,rag int a welo Doue.
9. Eüruz ar re a labour evid ar peoh,
rag anvet e vint bugale da Zoue.
10. Eüruz ar re o-deus da houzañv ablamour da zervij Doue,
rag dezo eo Rouantelez an Neñvou.
11. Eüruz oh-c'hwi,pa daolo an dud dismegañs warnoh,pa raint brezel deoh,
pa lavarint e gaou beb seurd droug eneb deoh,abalamour din-me:
12. bezit laquen ha tridit gand ar joa,
rag digoll kaer ho-peus da gaoud en Neñvou.


21

paotr yaouank,me 'ro urz dit:Sav!

Jezuz e-neus bet truez ouz an dud er boan,en drubuill,er hañv.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz.(7/11-17)

11. Jezuz a oa o vond d'eur gêr anvet Naim,
e ziskibien hag eur boblad tud a oa oh ober hent gantañ.
12. Digouezoud a reas tost da zor kêr,
d'ar mare m'edod o kas eun dén maro d'an douar,
e vamm n'he-doa nemetañ hag intañvez e oa .
Kalz tud a oa ouz he heul.
13. O weled an intañvez,Jezuz a gemeras truez outi
hag a lavaras dezi: "N'it ket da ouela !"
14. Tostaad a reas hag e touchas ouz an arched;
ar re a zouge ar horv a jomas a-zav
ha Jezuz a lavaras:
- Dén yaouank,me 'lavar dit : " Sav !" .
15. Neuze an dén maro a zavas,
a azezas war e hoañvez hag a gomzas;
Jezuz a roas anezañ d'e vamm.
16. An oll a grogas aon enno
hag e veulent Doue en eur lavared:
- Eur profed braz a zo deuet en òn touez
ha Doue a zo deuet da weled e bobl.
17. Ar vrud a gement-se a redas dre Judea a-bez
hag er broiou tro-war-dro.



ar béhérez pardonet dezi.

Pardonet eo bet dezi o vez m'he-deus bet kalz karantez.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 7/33-50

36. Eur farizian a bedas Jezuz da zebri gantañ,
mond a reas d'e di hag ez eas ouz taol.
37. Ha setu eur vaouez hag a rene eur vuaz fall e Kêr,
klevet ganti edo Jezuz ouz taol e ti ar farizian,
a zigasas eur pod alabastr leun a louzou-c'houez-vad.
38. Mond a ra a-dreñv da Jezuz ,e-harz e dreid;
o glebia 'ra gand e daelou,
o zeha gand he bleo,pokad dezo,
ha skuill warno louzou-c'houez-vad.
39. O weled kemend-all,ar Farizian e-noa pedet Jezuz
a lavare ennañ e-unan:
- Ma vefe bet hemañ eur profed,
e-nefe gouezet piou ha peseurd maouez
eo ar hini a douch outañ:
eur béhérez eo.
40. Neuze e lavaras Jezuz:
- Simon,eun dra bennag am-eus da lavared dit !
- Lavar,Mestr,emezañ.
Ha Jezuz:
41. - Bez e oa eur prester hag e-noa douz zleour;
unan a oa cleour a bempkant diner,
egile a hanter-kant.
42. O veza n'hellent ket paea o die,
e roas diskarg d'an eil ha d'egile.
43. Pehini anezo a garo anezañ ar muia ?
Simon a respontas:
- An hini moarvad e-neus bet ar brasa diskarg.
- Gwir a lavarez ! eme Jezuz.
44. Trei a reas neuze warzu ar vaouez,
en eur lavared da Zimon:
- Gweled a rez ar vaouez-se;
deuet on tre en da di ha n'ez-peus ket skuillet dour war va zreid,
hi e-neus glebiet anezo gard he daelou
ha sehet anezo gand he bleo.
45. N'ez-peus ket poket din;
hi,abaoe m'eo deuet en ti,
n'he-deus ket ehanet da bokad d'am zreid
46. N'ez-peus ket skuillet louzou-c'houez-vad war va fenn;
hi,he-deus skuillet louzou-c'houez-vad,a briz braz,war va zreid.
47. Setu perag e lavaran dit:
- He fehejou,braz an niver anezo,a zo pardonet dezi,
en abeg m'he-deus karet kalz;
med an hini a vez pardonet nebeud dezañ,a gar nebeud.

48. Ha neuze d'ar vaouez:
- Da behejou a zo pardonet dit.
49. Ar gouvidi a lavaras enno o-unan:
- Piou eo an dén-se hag a bardon ar pehejou zoken ?
50. Jezuz neuze d'ar vaouez:
- Saveteet out bet gand da feiz.
Kerz e peoh !

23

Piou eo va nesa ?

Kared Doue eo ar gourhemenn kenta.
An eil gourhemenn a zo par d'ar henta:
Kared a ri da nesa en eur zond war e zikour.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 10/25-37

25. En amzer-se, eun doktor war al lezenn a zav dirag Jezuz,
hag evid klask lakaad nehed anezañ, e-neus lavaret:
- Mestr, petra am-eus da ober evid kaoud ar vuez peurbaduz ?
26. Jezuz a houlenn digantañ:
- El Lezenn, petra 'zo skrivet, petra lennez enni ?
27. Egile a respont:
- Kared a ri an Aotrou da Zoue, a-greiz da galon,
gand da oll ene, da oll nerz ha da oll spered,
ha da nesa evel d'out da-unan.
28. Jezuz a lavar dezañ:
- Mad az-peus respontet,
gra kement-se hag e vev.
29. Hemañ avad, o klask en em denna, a lavar da Jezuz:
- Ha piou eo va nesa ?
30. Jezuz en-dro:
- Eun dén a oa o tiskenn euz Jeruzalem da Jeriko.
Koueza 'ra etre daouarn laeron,
a denn digantañ kemend e-nca,
a wall-sko gantañ hag a ya kuit,
en eur lezel anezañ hanter varo.
31. Digouezoud a-ra d'eur beleg diskenn dre ar memez hent.
Gweled a-ra an dén hag e tremen ebiou dezañ.
32. Evelse ivez eul peviad a zigouez eno,
a wel ar hêz dén hag a dremen ebiou.
33. Med eur Samaritan, o veaji, a erru d'e dro beteg ennañ,
hag ouz e weled, eo gounezet gand an druez.
34. Tostaad a-ra da liena dezañ e houliou,
en eur skuill warno eol ha gwin.
Goude e lak anezañ war gein e loan,
evid e gas d'an ostaleri, hag eno eh intent outañ.
35. Antronoz, e tenn euz e yalh daou bez arhant da rei d'an ostiz,
en eur lavared:
- Intentit mad outañ, ha ma vez brasoh ho mizou,
me ho paio pa vezin distro.

Pehini euz an tri-ze, a gav dit, a zo bet nesa
d'an den kuezet etre daouarn al laeron ?

37. Respont a ra an doktor:

- An hini 'zo bet trugarezuz en e geñver.
- Kae, eme Jezuz, ha te ive, gra evel dañ!

goulennit hag e vo roet deoh !

Jezuz a zesk deom pedi hag a lavar deom kaoud fiziañs:
selaouet e vo or pedenn.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 11/1-13

1. Eun devez, edo Jezuz o pedi;
echu gantañ e bedenn, unan euz e ziskibien a lavar dezañ:
- Aotrou, deskit deom pedi,
evel m'e-neus desket Yann Vadezour d'e ziskibier.
2. Jezuz a lavar dezo:
- Pa vezoh o pedi, larit:
Tad, hoh ano bezet santellê, ho rouantelez deuet deom.
3. Roit deom berrêz bara or bevañs.
4. Pardonit deom or pehejou, rag ni a bardon ivez d'ar re
'zo dleourien deom
ha n'on lezit ket da goueza e tentadur.
5. Lavaret e ree dezo c'hoaz:
- Lakom e-nefe unan bennag ahanoh eur mignon
hag a zeufe d'e gavoud e-kreiz an noz, da lavared dezañ:
"va mignon, prest din teir varaenn,
6. rag eur mignon din, o veaji, a zo erruet du-mañ
ha n'am-eus netra da ginnig dezañ.
7. Ha ma respontfe egile euz diabarz an ti:
- Lez ahanon e peoh. Prennet eo bremañ an nor,
va bugale, koulz ha me 'zo eet da gousked,
n'hellan ket sevel da rei bara dit.
8. Mad ! me henn lavar deoh,
goude ma ne zavfe ket da rei dezañ e houlenn dre vignoniaj,
e savo koulskoude dre forz beza tregaset gantañ,
hag e roio dezañ kement e-neus ezomm;
9. Lavared a ran deoh: "Goulennit hag e vo roet deoh,
klaskit hag e kavot, skoit hag e vo roet deoh,
10. rag an neb a houlenn a reseo, an neb a glask a gav,
hag an neb a sko a vez digoret dezañ.
11. Peseurt tad, en ho touez, ma teu e vab da houlenn bara digantañ,
a rofe eur mên dezañ,
ha ma houlenn eur pesk, daoust hag e-leh eur pesk,
e rofe dezañ eun naer ?
12. Pe ma houlenn eur vi, daoust hag e rofe eur grug dezañ.

13. Rag-se eta, ma ouezit c'hwi, daoust d'ar fall ma 'z oh,
rei traou mad d'ho pugale,
na pegement muioc'h ne roio ket ho Tad euz an neñv, ar Spered Santel,
d'ar re her goulennno digantañ.

25

Bezom atao prest da rei eun ene mad da Zoue.

Ar maro a zeu da skei pa zoñjer an nebeuta. On diwallit, Aotrou Doue,
diouz ar maro trumm.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz.

12/32-48

32. N'ho-pet ket aon, tropellad bian,
rag ho tad a zo plijet dezañ rei deoh ar Rouantelez.
33. Gwerzit ar pez ho-peus hag henn roit en aluzen.
34. Grit deoh yalc'hadou na uzont ket,
eun teñzor da badou d'en Neñv,
el leh ma ne dosta ket al laer,
ha ma ne deu ket an amprevaned da grignal,
rag el leh m'ema ho teñzor, eno ema ivez ho kalon.
35. Bezit atao prest, gand ho kouriz endro d'ho kroazlezh,
hag ho lampou war elum.
36. Bezit heñvel ouz tud o hortoz ar mare ma tistroio o mestr evid ar
evid digeri dezañ kerkent ha ma figouezo ha ma skoio. fest,
37. Eüruz ar zervicherien-se a gavo o mestr anezo war veill pa zistroio.
E gwirionez m'henn lavar deoh,
starda a raio e houriz,
ober a raio dezo azeza ouz taol hag o zervicher an eil goude egile.
38. Ha ma teu d'an eilved beilladenn, pe d'an trede,
ha m'o kav evelse, eüruz ar re-ze.
39. Gouzoud a rit ervad, ma ouezfe mestr an ti
da bed eur e teufe al laer, e chomfe da veilla,
ha ne lezfe ket toulla e di.
40. C'hwi ivez bezit prest, rag dond a ray mab an den,
d'an eur na zoñjit ket.
41. Neuze e lavaras Pèr:
-- Evidom-ni eo e lavarez ar barabolenn-ze, pe evid an oll ?
42. An Aotrou a respontas:
- Pehini eo ar merour feal ha fur,
a vo laketañ gand e vestr e penn e zervicherien,
evid rei da beb hini, d'ar houlz, e lod gwiniz ?
43. Ya, eüruz ar servicher-se,
a vo kavet gand e vestr, oh ober evelse.
44. E gwirionez m'henn lavar deoh, lakaad a ray anezañ
da vestr war e oll vadou.
45. Med ma lavar ar servicher-se, ennañ e-unan:
dale a ra va mestr da zond,
ha m'en em laka da skei gand ar mevelien hag ar mitizien,

- ha da zebri , da cya,d'en em vezvi;
46. mestr ar servicher-se a erruo d'an devez n'ema ket o hortoz,
ha d'an eur ne oar ket,
hag e raio skourjeza anezañ hag e lakaad e-touez an dud difeiz.
47. Ar servicher-se,hag a anavez bolontez e vestr,
ha n'e-no ket koulskoude preparet netra,
na greet hervez e zivizou,a vo kastizet;
48. Med an hini n'anavez ket ar volontez-se,
hag e-no meritet kastiz,hennez n'e-no ket kement a vazadou.
Kalz e vo goulennet digand an hini e-neus resevet kalz,
ha seulvui e vo bet fiziet en unan bennag,
seulvui e vo goulennet digantañ.

26

ar farizian hag ar publikan

Bezom izel a galon...

Bez truez ouzin,va Doue,peher ma 'z on.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 18/9-14

9. En amzer-ze,e lavaras Jezuz eur barabolenn
evid ar re a grede dezo e oant just
ha n'o-doa nemed disprij evid an dud all.
- 10.Daou zen a bignas d'an Templ da bedi;
unan anezo a oa eur Farizian,egile eur Publikan.
- 11.Ar Farizian,en e zav,a bede ennañ e-unan eyel-henn:
- Va Doue,ho trugarekaad a ran,en abeg n'on ket egiz ar re all:
laer,disleal,avoultrer,pe c'hoaz evel ar publikan-mañ.
12. Yun a ran diou wech ar zizun
ha rei a ran ivez an degved euz kement a hounezan.
- 13.Ar Publikan avad,en em zalhe e traoñ an Templ,
ne grede ket zoken sevel e zaoulagad etrezeg an Neñv
ha skei a ree war boull e galon,en eur lavared:
- Doue,ho-pet truez ouzin,peher ma 'z on.
- 14.Me lavar deoh:hemañ a ziskennas d'e di,pardonet gand Doue,
med nann egile,
rag an neb en em uhella a vo izelleet
hag an neb en em izella a vo uhelleet.

27

diskibien Emmaüs.

Jezuz,savet a varo da vev a ra hent gand diskibien Emmaüs.
Ganeom e chom ivez bepred evid or sklerijenna hag or hennerza.

13. En deiz-se, setu ma oa daou anezo o vont d'eur vourc'h,
war-hed tri-ugent stadenn diouz Jeruzalem,
heh ano Emmaüs,
14. hag e komzent etrezo diwar-benn kement tra a oa hoarvezet.
Ha setu epad ma oant o komz hag o vreutaad,
Jezuz e-unan a dostaas hag en em lakas d'ober hent ganto;
16. med dalhet e oa o daoulagad ma ne oant ket evid en anavezoud.
17. Hag e lavaras dezo:
- Petra eo ar homzou-se a lavarit an eil d'egile,
en eur vond gand an hent ?
Chom a rejont a-zav, leun a dristidigez.
18. Unan anezo, anvet Kleopaz, a respontas outañ:
- Te eo an estren nemetañ, o chom e Jeruzalem,
a vefe heb gouzoud petra a zo bet hoarvezet enni,
en deiziou-mañ ?
19. - Petra 'ta ? emezañ.
Ar re-mañ a respontas:
- Ar pezh a zo en em gavet gand Jezuz a Nazared,
a oa en em ziskouezet evel eur profet galloudus
en e oberou hag en e gomzou,
dirag Doue ha dirag ar bobl a-bez;
20. ha penaoz o deus or beleien vraz hag or pennadureziou
en droukroet da veza barnet d'ar maro,
hag en staget ouz ar groaz...
21. Ni avad, a espere e oa hennez an hini a zasprenfe Israël;
hogen gand kement-se oll, eo bremañ an trede deiz
abaoe m'eo digouezet an traou-se.
22. Gwir eo ez eo bet strafuillet or spered
gand eun nebeud merhed euz on touez:
eet int d'ar bez da houlou-deiz,
23. ha pa n'o-deus ket kavet e gorr,
ez int distroet en eur lavaroud
o devoa gweled efez zoken, hag a lavar ez eo beo.
24. Ha darn euz or c'humpagnuned a zo eet d'ar bez,
hag o-deus kavet an traou,
evel m'o-devoa lavaret ar gwragez;
eñ avad n'o-deus ket e welet.
25. Neuze e lavaras dezo:
- O tud dispered ha goustad ho kalonou
da gredi kement o-deus lavaret ar Brofeted !
26. Daoust ha ne oa ket ret d'ar Hrist gouzañv ar poaniou-se,
ha mond evelse en e hloar ?
27. Hag o kregi gand Moizez hag an oll Brofeted,
e tisplegas dezo, en oll Skrituriou,
ar pezh a oa diwar e benn.
28. Evelse, ec'h errujont tost d'ar vourc'h ma 'z aent,
med eñ a reas van da vond hirah.
29. Med derhel a rejont warnañ, en eur lavaroud:
- Chom ganeom, rag setu ar serr-noz o tond,
hag ema an deiz o tiskenn.
29. Hag ec'h antreas eta evid chom ganto
30. Hag e hoarvezas pa oa ouz taol ganto,
ma kemeras ha ma vennigas ar bara,

ha m'en roas dezo.

31. Neuze avad, o daoulagad a zigoras hag en anavezoud a rejont;
eñ avad en-doa en em guzet diouto.

32. Hag e lavarjont an eil d'egile:

- Daoust ha ne verve ket or halon en or hreiz,
pa gomze ouzom war an hent,
ha pa zizoloe deom ar Skrituriou ?

33. Hag o sevel raktal, e tistrojont da Jeruzalem.

Eno e kavjont bodet an Unneg hag o c'humpagnuned;

34. a lavaras dezo:

- Evid gwir dasorhet eo an Aotrou,
hag en em ziskouezet eo da Zimon.

35. Hag i o-unan a zisplegas ar pezh a oa hoarvezet war an hent,
ha penaoz o-devoa anavezet anezañ gand rannidigezh ar bara.

28

pedet om ouz taol Jezuz

Gand Sakramant an Aoter, e ro Jezuz deom an arrez
euz ar Vuez peurbaduz.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. 6/53-58.

53. Jezuz eta a lavar dezo:

- E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh:
ma ne zebrit ket korv Mab an den, ha ma n'evit ket e wad,
n'ho-peus ket ar vuez ennoh.

54. An neb a zebr va Horv hag a ev va Gwad, e-neus ar Vuez Peurbaduz
ha me 'zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.

55. Rag va Horv a zo gwir vagadur ha va Gwad gwir evaj.

56. An neb a zebr va Horv hag a ev va Gwad
a jom ennon ha me ennañ.

57. Koulz ha m'e-neus va Zad, an Hini beo, kaset ahanon
hag am eus buez dre va Zad,
an neb a zebr ahanon,
hennez ive e-no buez drezon.

58. Setu pehini eo ar Bara diskennet euz an Neñv;
er hontrol d'o tadou, o-deus bet ar mann da zebri
hag a zo maro,
an neb a zebr ar Bara-mañ a vevo da viken.

oooooooooooo
oooooooooooo
oooooooooooo
oooooooooooo
oooo

ar pastor ma

Ar pastor mad a ro e vuez evid e zeñved.
Jezuz e-neus roet e vuez evid silvidigez an dud.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann 10/11-18

Kement-mañ a lavare Jezuz d'ar Juzevien:

11. Me eo ar pastor mad.
Ar pastor mad a ro e vuez evid e zeñved.
12. An hini n'eo nemed mevel, ha n'eo ket eñ ar pastor,
pa n'eo ket an deñved e re dezhañ,
a jom dizober da zelled ouz ar bleiz o tond,
a zilez an deñved hag a gemer an teh;
hag ar bleiz a daol e skilfou war an deñved hag o skign a-beb tu.
13. Ar mevel a gemer an teh, peguñ n'eo nemed mevel
ha n'eo ket chalet gand an deñved.
14. Me eo ar pastor mad: anaoud a ran va re,
ha va re ivez am anavez,
15. evel ma anavez an Tad ahanon, ha me ivez a anavez an Tad;
ha va buez a roan evid va deñved.
16. Deñved all am-eus c'hoaz, ha n'emaint ket er park-deñved-mañ;
ar re-ze ivez am-eus da zigas davedon: kleved a raint va mouez,
ha ne vo nemed eur bagad deñved, hag eur pastor hebkén.
17. Ma kar an Tad ahanon, eo abalamour ma roan va buez,
evid he hemer en-dro.
18. Dén ebéd n'e-neus tennet anezi diganin,
med me eo a ro anezi ahanon va-unan;
galloud am-eus d'he rei, ha galloud d'he hemer en-dro.
Kement-se am-eus bet gourhemenn da ober a-berz va Zad.

savet eo Jezuz euz a varo da veo.

En em ziskouez a ra d'e Ebestel,
da genta heb na ve Tomaz ganto ha goude-ze dezo oll.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann 20/19-31

19. Da zeiz kenta ar zizun, goude maro Jezuz, diouz an abardaez,
an noriou 'zo bet prenet war al leh m'ema an diskibien,

DRE aon rag ar Juzevien. Dond a ra Jezuz
ha setu Eñ en o zouez:" Ar peoh ra vo ganeoh ! emezañ.

20. Goude ar gomz-se, e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.
Laouen braz eo an diskibien o weled an Aotrou.
21. Jezuz a lavar dezo a-nevez:
- Ar peoh ra vo ganeoh !
Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon, me ho kas dam zro.
22. Goude ar homzou-se, e c'houez warno, en eur lavared:
- Resevit ar Spered Santel !
23. D'ar re ho-po pardonet dezo o fehejou, e vezint pardonet,
ha d'ar re ho-po dalhet outo, e vezint dalhet.
24. Bez 'e oa unan euz an daouzeg, Tomaz, an hini anvet ar Gevell,
ha ne oa ket ganto pa oa deuet Jezuz.
25. An diskibien all a lavar dezañ:
- Gwelet on-neus an Aotrou !
Med eñ a zistag outo:
- Ma ne welan war e zaouarn ar merk euz an tachou,
ma ne lakan ket va biz e toullou an tachou
ha va dorn en e gostez, me ne gredin ket.
26. Eistez goude, ema an diskibien adarre en ti, ha Tomaz ganto.
Prennet an norioù, setu Jezuz deuet e-barz, en e zav 'kreiz e ziskibien,
hag e lavar dezo:
- Ar peoh ra vo ganeoh !
27. Goude-se e lavar da Domaz:
- Lak da viz amañ ha gwel va daouarn;
tosta da zorn, ha lak anezañ em hostez:
na jom ket heb kredi, med deus da gaoud feiz.
28. Tomaz dezañ neuze:
- Va Aotrou ha va Doue!
29. Ha Jezuz:
- Ablamour n'az-peus gwelet, out deuet da gredi;
eüruz ar re o-deus bet feiz heb beza gwelet !
30. Stank eo ar zinou burzuduz all e-neus grêt Jezuz,
dirag e ziskibien ha n'int ket skrivet el levr-mañ.
31. Ar re-mañ a zo bet skrivet ablamour dech da gredi eo Jezuz or Zalver,
Mab Doue, ha, dre ho feiz, da gaoud buez en e ano.

en ano Jezuz, sav ha kerz....!

Ni ivez a vez dinerz war hent ar zilvidigez.

Doue a hell rei nerz deom.

Setu amañ ar burzud greet gant Sant Pêr ha Sant Yann.

Lennadenn euz Levr Oberou an Ebestel. (3/1-10)

1. Eun deiz, da deir eur goude kreisteiz, eur ar bedenn,
edo Pêr ha Yann o pignad d'an Templ e Jeruzalem.
2. Ha dres (HA SETU) edod o tougen beteg eno eun den kamm,

SOnnet e zivesker abaoe ma oa anezañ, hag a veze digaset bemdez e-kichen eun nor euz an Templ anvet an Nor Gaer, da houlenn aluzen digand an dud a veze o vond en Templ.

3. An dén-se a wel Pèr ha Yann war-nez antreal en Templ hag a stag d'eo fedi evid kaoud eun aluzen diganto.
4. Pèr a zalh e zaoulagad paret warnañ, ha Yann kenkoulz all; lavared a ra dezañ:
- Sell mad ouzom !
5. Egile a jom digor braz e zaoulagad da zelloud outo, o hortoz kaoud eun dra bennag diganto.
6. Pèr a lavar dezañ:
- N'am-ous nag tarhant nag gour,
med ar pezh am-ous a roan dit;
a-berz ar Zalver Jezuz, euz Nazared, sav ha bale!
7. Tapoud a ra peg(KROG)en e zorn deou evid e zevel, ha kerkent eo startet e zivesker, beteg seuliou e dreid.
8. En eul lamm ema en e zav hag en em laka da vale; antreal a ra ganto en Templ, dalhmad o vond hag o tond, o fringal hag o veuli Doue.
9. An oll dud a oa eno o-deus e velet o vale hag o veuli Doue.
10. E anaoud a reont evid beza an hini a veze o houlenn aluzen e-kichen an Nor Gaer euz an Templ; sebezet krenn e oant, ha ne hellent ket kompren petra oa choarvezet gantañ.

silvidigez ebéd nemod e Jezuz-Krist!

tud 'zo hag a laka o fiziañs e traou ar bed-mañ:
madou, galloud. Ni a laka or fiziañs e Jezuz Krist.

Lennadenn euz Levr Oberou an Ebestel. 4/8-12

8. Goude ar pare roet d'eun dén kamm,
an Abostol Pèr a zo bet galvet dirag kuzul-meun ar Yuzevien.
Ar Spered Santel gantañ, e komz outo evel hénn:
9. - C'hwil, pennoù braz ha re goz ar bobl, selaouit!
Prosez a reer deom hirio ablamour d'a vad grêt d'eun dén kamm,
evid anaoud penaoz e-neus bet ar pare.
10. Deoh eta da houzoud, c'hwil oll ha pobl Israel a-bez,
eo dre an Jezuz Krist a Nazared eam an dén-se yah dirazoh:
C'hwil ho-poa e staget ouz ar groaz,
Doue e-neus grêt dezañ sevel a-douez ar re varo.
11. En eo ar mên a zo bet bannet kuit ganeoh, saverien an ti,
hag a zo grêt anezañ ar mên-korn.
12. N'eus ket a zilvidigez dre hini all ebéd,
ha dindan bolz an neñv, n'eus roet e-touez an dud
ano all ebéd a hellfe or zavetei.

33

bugale om da Zoue.

ma karom gouzañv or poaniou a-unan gand an Aotrou Krist,
ez aim ivez, a-unan gantañ e gloar Doue.

Lennameh euz Lizer an Abostol Sant Paol da gristenien Rom. 8/14-17

14. Va breudeur, an oll dud a vez r-net o buez gand Spered Doue,
ar re-ze a zo bugale da Zoue.
15. M'ho-peus resevet ar Spered, n'eo ket evid ober ahanoh c'hoaz,
e-keñver Doue, servicherien o krena gand aon;
med resevet ho-peus eur Spered hag a ra ahanoh
bugale digemeret e famill Doue,
ar Spered a lak ahanon da grial dezañ: "Abba ! Tad !
16. Ar Spered Santel e-unan a ro testeni d'or spered-ni
ez om bugale Doue.
17. Neuze 'ta, ma'z om e vugale, ez om ivez heritourien d'e vadou,
heritourien da Zoue,
hogen ken-heritourien a-unan gand an Aotrou Krist,
pegwir a-unan gantañ on-eus da houzañv or poaniou,
evid mond ivez a-unan gantañ e gloar Doue.

34

piou a hello on distaga diouz Karantez an Aotrou Krist ?

ar hleñved hag ar boan a zeu d'on dispartia diouz kalz euz or herent
pe or mignoned. Med sikouret gand Doue, e hellom trehi war gement a zeufe
da glask on distaga diouz an Aotrou Krist.
Selaouom petra 'lavar Sant Paol d'ar Romaned. 8/31-35//37-39

31. Va breudeur kër, m'ema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom ?
32. N'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan,
roet e-neus anezañ evidom oll:
penaoz gand e Vab, ne rofe ket deom peb tra ?
33. Piou a zavo tamallou a-eneb an dud dibabet gand Doue,
pa 'z eo Doue an hini a laka dibehed ?
34. Piou a gondaonio, pa 'z eo Iezuz Krist an hini 'zo marvet,
gwelloc'h c'hoaz, a zo savet da veo, a zo en tu deou da Zoue
hag a bed anezañ evidom ?
35. Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist ?
ar waskêrêz, an anken, an heskinêrêz, an naon,
an dienez, ar riskl, ar hleze ?

37. Nann ! E kement-se ema an treh ganeom,
dre zikour an Hini e-neus or haret.
38. Ya, sur om a gement-se !
Nag ar maro, nag ar vuez,
nag an Elez, nag an oll grouadurien kuzet,
nag an amzer a vremañ, nag an amzer da zond,
nag ar stered, nag an neñvou,
nag an oll donderiou, na tra grouet all ebéd,
netra n'hellon distaga diouz karantez an Aotrou Doue,
a zo e Jezuz Krist, on Aotrou.

35

klask atao plijoud da Zoue.

eun devez, ez aim dirag Doue.

E-keid ha m'emaom war an douar, klaskom plijoud da Zoue;
barnet e vezim gantañ. Ar baradoz a zo ouz or gortoz.

Selaouom an Abostol Sant Paol

(II Kor. 5/6-10)

6. Dineh-kaer e chomom bepred (STARD OR HALON E CHOMOM BEPRED)
ha pa'ouzm penaoz, keid ha m'emaom o veva en or horv,
emaom en harlu, pell diouz ti an Aotrou Doue;
7. rag dre ar feiz e kerzom (warzu ennañ), n'eo ket dre ar gweled anezañ.
8. Ya, sur, dineh-kaer ez om, ha kalz gwelloc'h e kavom
diloja euz ar horv-mañ ha mond da veva e ti Doue.
9. Or brasa preder eo plijoud dezañ, koulz er gêr pe pell diouz ar gêr.
10. Rag oll e rankim en em ziskouez evel m'emaom,
evid beza barnet gand or Zalveer,
ha reseo peb hini ar pezh e-no gounezet
o veva en e gorv, mad pe fall.

36

sant Paol e-kreiz e boaniou.

gouzañv a ra a-unan, gand an Aotrou Krist,
hag e kav eno levez.

Lennadenn euz Lizer an Abostol Sant Paol da gristenien kêr-Kolos. (1/24-26)

24. Va breudeur, ar poaniou a houzañvan, a ra bremañ va levez,
rag ar pezh a jom da houzañv euz poaniou Jezuz Krist,
eo a zougan em hbrv a-unan, evid e Gorv dezañ, an Iliz.
25. Deuet on da veza ministr euz an Iliz,
dre ar garg e-neus Doue fiziet ennon en ho keñver:
embann penn-da-benn Komz Doue.
26. Ar mister dalhet kuz beteg-henn,
abaoe ar penn kenta euz ar bed,
euz an oll rummadou tud,
a zo bet roet bremañ da anaoud d'ar bobl santel.

27. Doue 'zo teurvezet gantañ rei da anaoud
pegen braz teñzor eo evid ar bayaned ar menoz kuzet-se:
an Aotrou Krist ennoh, Eñ, esperañs ar hloar.
28. Ar Hrist-se a brezegom-ni,
o lakaad an dud d'en em zoñjal,
o kelenn pep den, gand furnez,
evid o digas d'ar zantelez e Jezuz Krist.

37

Lennadenn euz Lizer Sant Jakez.

5/13-16

13. Er boan ema unan bennak ahanoh ? Dezañ pedi;
Karget a nerz-kalon, dezañ kana salmou.
14. Klañv eo unan bennag ahanoh ?
Ra halvo beleien an Iliz.
D'ar re-mañ pedi evitañ hag olevi anezañ
gand eoul en Ano an Aotrou.
15. Pedenn ar feiz a zalvo an hini klañv
hag an Aotrou hen adsavo,
ha m'e-neus greer pehejou, e vezint pardonet dezañ.
16. Kovesait eta ho mankou an eil d'egile
ha pedit an eil evid egile, evid ma vezoh pareet,
rag galloud braz he-deus pedenn virvidig an den just.

38

kaoud feiz ha karantez.

an hent da vond d'ar zilvidigez eo kaoud feiz e Jezuz Krist
ha kaoud karantez evid Doue hag an nesa,
n'eo ket dre gomz hebken, med dre ober.
Selaouom an Abostol Sant Yann.

I Yann 3/I8-24

18. Va bugale vian, karantez a dleom kaoud,
n'eo ket dre gomz na diwar beg an teod,
med dre ober hag e gwiricnez.
19. Setu amañ penaoz e vezim sur da veza euz tu ar wirionez
hag e lakim or houstiañs er peoh dirag Doue:
20. ma tigouez a rafe or houstiañs rebechou deom,
Doue a zo brasoh eged or houstiañs hag a anavez peb tra.
21. Va muia-karet, ma n'he-deus or houstiañs netra da rebech deom,
neuze on-eus dor zigor da vond beteg Doue,
22. hag e resevom digantañ kement tra a hellom goulenn.
Ablamour ma virom e hourhemennou,
ha ma reom ar pezh a ra plijadur dezañ.
23. Hemañ eo e hourhemenn: kaoud feiz e Jezuz Krist, e Vab,
hag en em gared kenetrezom, evel m'e-neus gourhemennet deom.
24. An neb a zalh da vired e hourhemennou, a jom unanet gand Doue,
ha Doue a zo o chom ennañ; hag evid gouzoud ema o chom ennom, on-eus
ar Spered e-neus roet deom.

ma en em garom an eil egile,
Doue a zo o chom ennom.

L'Ennadenn euz Lizer Kenta Sant Yann

4/7-16

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,
peogwir eo ar garantez euz a Zoue,
ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue
hag e-neus anaoudegez a Zoue.
8. An neb n'e-neus ket karantez, n'e-neus ket anavezet Doue,
rag Doue a zo Karantez.
9. Evel-henn eo deuet karantez Doue da bara en on touez:
e Vab unganet e-neus Doue kaset er béd,
deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo ema ar garantez: n'eo ket ni on-eus karet Doue,
med Eñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab,
da veza roet e sakrifik evid or pehejou.
11. Va re muia karet, peogwir e-neus Doue karet ahanom kement,
ni a dle, diouz on tu, en em gareu an eil egile.
12. Doue n'e-neus dén gwelet anezañ biskoaz.
Med, ma 'n em garom an eil egile,
ema Doue o chom ennom,
hag e garantez a zo ennom en he haerra.
13. Gand an dra-mañ ez om sur emaom o chom ennañ
hag Eñ o chom ennom:
perz en e Spered e-neus roet deom.
14. Ha ni, p'on-eus gwelet gand on daoulagad,
ni a ro testeni e-neus an Tad
kaset e Vab da veza Salver ar béd.
15. Kement hini a ziskleir eo Jezuz Mab Doue,
ema Doue o chom ennañ, hag Eñ o chom e Doue.
16. An hini a zo deuet da anaoud ervad
ar garantez e-neus Doue evidom,
hag on-eus kredet enni.
Karantez eo Doue: an neb
a zo o chom er garantez a zo o chom e Doue,
ha Doue a zo o chom ennañ.

prosesion vraz an dud eüruz

Sant Yann e-neus^o gwelet euz peb bro, euz peb gouenn, euz peb yez.

Pennad euz Levr an Diskuliadur gand an Abostol Sant Yann 7/2-4,9-14

2. Setu ar pezh am eus gwelet, me, Yann:
eun El a oa o sevel d'an neñv diouz kostez ar zav-heol,
siell an Doue beo gantañ.
Hopet e-neus a vouez kreñv d'ar pevar El o doa bet galloud
d'ober droug d'an douar ha d'ar mor,
3. hag e lavare:
- Na rit ket a zroug d'an douar, na d'ar mor, na d'ar gwez,
ken na vo merket ganeom, war o zal, servicherien on Doue.
4. Hag am-eus klevet lavared péd a oa merket gand ar ziell:
pevar ha seiz-ugent mil (pe: KANT PEVAR HA DAOU-UGENT MIL)
daouzeg mil euz peb meuriad bugale Israel.
9. Goudeze am eus gwelet eun engroez vraz a dud,
na helle dén konta péd a oa anezo (PED-E OANT)
euz kement bro, kement rumm, kement pobl ha kement yéz a zo,
oll en o zav dirag tron Doue ha dirag an Oan,
dillad gwenn ganto, ha skourrou palmez en o daouarn;
10. hag e savent uhel o mouez, o lavared:
- Ar zilvidigez a zo d'on Doue, azezet war an tron, ha d'an Oan ive!
11. Hag an oll Elez a oa en o zav, tro-dro d'an Tron,
en-dro d'ar re goz ha d'ar pevar aneval beo;
eet int da stoui dirag an tron, o fenn d'an douar,
evid adori Doue, en eur lavared:
12. - Amen! Bennoz ha gloar, furnez ha trugarez, enor, galloud ha nerz
d'on Doue da virviken. Amen!
13. Unan euz ar re goz, neuze, a lavar din:
- Ar re-ze, dillad gwenn ganto,
piou int, hag a beleh int deuet?
14. Ha me da respont:
- Va Aotrou, c'hwi eo a oar.
Setu e lavar din en taol-mañ:
- Bez 'int ar re 'zo o tond euz an drubuill vraz;
gwalhet o deus o dillad, ha gwennet anezo gand gwad an Oan.

41

ne vo mui na maro, na daelou, na disparti.

baradoz dudiuz, tro ar Zent eo va bro.

Lennadenn euz Levr Diskuliadur Sant Yann 21/1-5a

1. En deiziou-se, me, Yann, am eus gwelet eun neñv nevez
hag eun douar nevez,
rag an neñv kenta hag an douar kenta a oa eet ebiou (DA GET),
hag ar mor ne oa mui anezañ.
2. Ha me, Yann, am eus gwelet ar gêr zantel, Jeruzalem nevez,
o tiskenn euz an Neñv, a gichen Doue,
kempennet evel eur wreg nevez fichet evid^he gwaz.
3. Ha klevet am eus eur vouez kreñv o tond euz an traoñ, hag a lavare:
- Setu demeurañs Doue gand an dud, bez 'e vo o chom ganto,
int a vo e bobl, ha Doue e-unan a vo ganto.

Seha a raio Doue an oll daelou euz o daoulagad,
 hag ar maro ne vo mui anezañ;
 ne vo mui k/añv, na klemm, na poan,
 rag ar béd kenta a vo eet ebiou (DA GET).

5. Hag an Hini 'oa azezet war an tron e-neus lavaret:
 - Setu emañ oh ober nevez peb tra !

42

deuit, Salver Jezuz !

da echui e weledigez diweza, Sant Yann e-neus komzou dudiuz diwar-benn
 distro or Zalver, a hortozom laouen.

Pennad euz Levr an Diskuliadur gand an Abostol Sant Yann. 22/12-20

12. Me, Yann, am-eus klevet eur vouez o lavared din:

- Emañ o tond dizale ha va gobr a vo ganin
 evid rei da beb-hini hervez e bae,
 evid rei da beb-hini hervez e labour.

13. Bez 'on an alfa hag an omega, ar henta hag an diweza,
 ar penn kenta hag ar fin.

14. Eüruz ar re a oar gwalhi o gwiskamant,
 evid kaoud gwir war frouez ar wezenn a vuez,
 hag antreal er Gêr Zantel dre an noriou.

Me, Jezuz, am-eus kaset va êl da rei testenî deoh a gement-se
 evid an Ilizou.

Me 'zo euz lignez David hag euz e wad
 steredenn lugernuz ar mintin.

17. Ar Spered ha pried an Oan a lavar:

- Deuit !

An neb a glever ra lavaro: "Deuit !"

An neb e-neus sehed, ra zeuio da eva,

an neb e-neus c'hoant, ra gemero euz dour ar vuez evid netra.

20. Ha lavared a ra an Hini a zoug testenî euz an tron-se:

- Ya, dond a ran dizale !

AMEN ! DEUIT, AOTROU JEZUZ !

00000000

000000

00

0

Dirag eur hristen war e dremnvan

It euz ar béd-mañ, ene kristen, en ano Doue, an Tad oll-halloudeg,
 e-neus ho krouet;
 en ano Jezuz Krist, Mab an Doue beo, e-neus gouzañvet evidoh;
 en ano ar Spered Santel, a zo diskennet warnoh;
 en ano ar Werhez Gloriuz Vari, Mamm da Zoue;
 en ano Sant Jozef, pried gloriuz ar Werhez Vari;
 en ano an Elez hag an arhêlez hag an oll rummadou êlez euz an Neñv;
 en ano ar Batriarked hag ar Brofeted;
 en ano an Ebestel hag an Avielerien Zantel;
 en ano ar Verzerien hag ar Gonvesored;
 en ano ar Veneh hag an Ermited Santel;
 en ano ar Gwerhezed;
 en ano an oll Zent ha Sentezed Doue;
 ra 'z eot hirio da jom en eul leh a beoh, e Jeruzalem an Neñv.

AMEN !

Pedom !

O va Doue, leun a vadelez, leun a drugarez,
 digor atao ho kalon d'an druez evid pardon! ar beherien
 o-deus keuz d'o fehejou,
 grit eur zell a druez ouz ho servicher (SERVICHEREZ),
 ha peogwir e houlenn pardon euz e oll behejou, a-greiz-kalon,
 selaouit or pedenn !

Tad leun a vadelez, renevezit, en e ene, ar pezh a zo bet saotret,
 pe dre zempladurez an den,
 pe dre fallagriez an droug-spered;
 grit ma vezo unanet gand memproù an Iliz,
 peogwir eo bet prenet gand gwad ho Mab.
 Bezit truez, o va Doue, ouz e glemmou,
 bezit truez ouz e zaelou;
 ha peogwir n'e-neus fiziañs nemed en ho trugarez,
 plijet ganeoh e zigemeret (HE DIGEMERED) e mister ho pardon.
 Dre Jezuz Krist, on Aotrou !

AMEN !

Va breur kêr (VA HOAR GER), da lakaad a ran etre daouarn
 an Aotrou Doue oll-halloudeg, e-neus da grouet,
 evid ma helli, goude beza paeet, dre ar maro, dle peb den war an douar,
 distrei daved da Grouer e-noa furmet ahanout gand eun tamm pri.
 Pa nijo da ene diouz da gorv,
 ra zeuio d'az tiambroug arme skeduz an Elez;
 ra vezi digemeret gand an Ebestel eüruz,
 ra ziredo arme gloriuz ar Verzerien dirazout,
 ra vezo en-dro dit pobl glan ha skeduz Kovesored ar feiz,
 ra vezi digemeret gand strollad laouen ar Gwerhezed,

ra bedo evidout an Oll Zent ha Sentezed euz ar Baradoz,
o-deus er béd-mañ, gouzañvet poaniou evid Jezuz Krist,
ra vezi karget a beoh eüruz, e kerhenn ar Batriarked,
ra zeuio Sant Jozef, patron karantezuz ar re a zo war o zremenven
d'az kennerzi, leun a esperañs.
Ra zeuio ar Werhez Vari, Mamm da Zoue,
frealzidigez leun a zouster ar re a zo er boan,
da ober ouzit eur zell a vamm,
ma vezi diwallet diouz spont ar maro,
ha ma helli mond laouen, en he hompagnunez, da Rouantelez an Neñv,
Ra ziskouezo or Zalver Jezuz Krist d'it eun dremm laouen
ha ra roio dit eur plas etouez ar re en em zalh atao dirazoh.
EVELSE BEZED GREET !

PEDENNOU d'an TAD EUZ AN NENV

Digemerit, va Doue, ho servicher (SERVICHEREZ) ha digorit dezañ (DEZI)
ar Baradoz a hortoz digand ho madelez.....EVELSE BEZED GREET!

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus diwallet
Enok hag Eli diouz ar maro na espern dén... pe
AMEN !

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus salvet Noe dicuz an dour-
beuz...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus tennet Abraham euz Ur, e
bro-Kaldea...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus tennet Job euz e boan-
ioù...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus tennet Izaak euz daouarn
e dad Abraham, a oa o vond d'hen lakaad d'ar maro...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, veel m'ho-peus tennet Lot euz Sodom hag
euz a greiz an tan...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus tennet Moizez euz daouarn
Pharaon, roue an Ejipt...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus diwallet Daniel a-eneb al
loened...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus diwallet an tri zén yaouank
taolet en eur forn horet gand eur roue kriz...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus diwallet David diouz Saül
ha diouz Goliath...

Diwallit, va Doue, ene ho servicher, evel m'ho-peus tennet Sant Pêr ha Sant Paol
euz ar prizon...

hag evel m'ho-peus tennet Tekla, gwerhez ha merzêréz euz tri seurd poaniou
skrijus;

evelse ra blijo ganeoh diwall ene ho servicher,
ma 'z ay ganeoh da gemered perz e eürusted an Neñv...

Pedom...

Me laka etre ho taouarn, va Doue, ene ho servicher.
Ni ho ped, Jezuz Krist, Salver ar béd, digemerit etouez ho Patriarked an ene-
mañ, peogwir evitañ ho-peus bet ar vadelez da ziskenn war an douar.
Anavezit, Aotrou, ho krouadur,
c'hwí eo, an Doue hepken, beo ha gwirion, ho-peus e grouet,

rag ne 'z-eus Doue all ebéd nemedoh.

Rolt levenez d'an ene-mañ, pa 'z ay dirazoh;
na zalhit ket a zoñj euz e behejou tremenet.
Pegement bennag e-neus pehet, evelato, n'e-neus ket nahet an Tad,
ar Mab hag ar Spered-Santel;
kredet e-neus enno, dalhet e-neus e feiz;
chomet eo fidel da adori Doue, Krouer ha Mestr peb tra.

Pedom...

Ankounac'hait, va Doue, pehejou e yacuankiz,
na zalhit ket soñj euz e faziou;
med en ho trugarez divuzul sellit outañ euz gloar an Neñv.

Ra zigoro evitañ ar Baradoz,
ra zeuy an Elez da gemered perz en e levenez.

O va Doue, digemerit ho servicher en ho Rouantelez.
Ra vezo digemeret gand Sant Mikael, Arhêl Doue,
an hini a zo e penn armeou an Elez.

Ra zeuio d'hen diambroug ha d'hen ren da Jeruzalem an Neñv.
Ra vezo digemeret gand an Abostol eüruz Sant Pêr,
an hini a zo fiziet ennañ alhweziou ar Baradoz.

Ra vezo sikouret gand an Abostol Sant Paol,
e-neus meritet beza dibabet gand Doue.

Ra bedo evitañ an Abostol Sant Yann, Abostol muia-karet ar Mestr,
a zo bet diskleriet dezañ Misterioù an Neñv.

Ra bedo evitañ an oll Ebestel,
a zo bet roet dezo ar halloud da liamma ha da ziliamma.

Ra bedo evitañ an OLL Zent hag oll Sperejou eüruz ar Baradoz,
o-deus gouzañvet poaniou ar bed-mañ evid Jezuz Krist;
evid ma hello, goude beza distaget diouz e gorv,
en em gavoud e gloar Rouantelez an Neñvou,
dre hras Or Zalver Jezuz Krist,
a vev gand an Tad hag ar Spered Santel,
a-oll-viskoaz .

EVELSE BEZED GREET !

Pedom

Santez Mari, pedit evidon, Mamm a hras, Mamm a druez, va difennit diouz an
enebour, va digemerit d'an eur euz or maro.

Pedomm

Me en em dro ouzoh, Sant Josef, patron ar re a zo war o zremen van,
hag hoh asped da zond war zikour ene ho servicher (SERVICHEREZ)
a zo gand e stourmad diweza, rag c'hwi a zo bet kemmerzet,
da eur ho maro, gand Jezuz ha Mari,
ma vo dre o skoazell hag hoh hini, divennet a-eneb lasou an droug-spered
ha ma hello en em gavoud en eürusted da viken.

EVELSE BEZED GREET !

Pedennou berr da lavared, pa weler ar maro o tostaad.

Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidon, peherien, bremañ hag en eur euz ar
maro...EVELSE BEZED GREET!

Jezuz !...Jezuz !...Jezuz !...digemerit va ene !

Etre ho taouarn, va Doue, e lakan va ene !

Santez Mari, pedit evidom !

Santez Mari, leun a hras, Mamm leun a druez,
wa diwallit diouz an droug-spered.

Digemerit ahanon d'an eur euz va maro,

Sant Jozef, pedit evidon ! Digorit din ar Baradoz !

Jezuz ,Mari, Jozef, sikourit ahanon war va zremen van !

Jezuz, Mari, Jozef, me ro deoh va halon ha va buez !

Jezuz, Mari, Jozef, grit din mervel en ho kompagnunez santel

Pedennoù da lavaret d'an eur euz ar maro.

Deuit, Sent Doue, Elez euz ar Baradoz, deuit d'hen ambroug !

Kemerit e ene ha kinnigit anezañ da Zoue oll-halloudeg.

Ra viot digemeret gand Jezuz Krist e-neus ho kalvet,
ra viot douget gand an Elez, e kichen Abraham.

Roit dezañ, va Doue, an diskuiz peurbaduz hag ar sklerijenn a bado da viken.

Aotrou Doue, ho pet truez ouzom!

Jezuz Krist, ho pet truez ouzom!

Aotrou Doue, ho pezit truez ouzom !

Hon Tad hag a zo en Neñv,

hoh Ano bezet santelleet,

ho Rouantelez deuet deom,

ho polontez bezet greet war an douar evel en Neñv.

Roit deom, hirio, or bara pemdezieg.

Pardonit deom or pehejou evel ma pardonom d'ar re o-deus manket ouzom;

ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,

med on diwallit diouz an droug.

Roit dezañ, va Doue an diskuiz peurbaduz ! / Ra baro evitañ ar sklerijenn a bado da viken !

Diouz doriou an ifern ! / Diwallit e ene, o va Doue !

Ra vezo e peoh ! / Amen !

Pedom...Ni ho ped, Aotrou Doue, da gaoud truez ouz ene ho servicher, evid ma vezo ganeoh goude m'eo maro; dre ho trugarez, pardonit dezañ ar pehejou e-neus greet war an douar, rag sempladurez an den a zo bras.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

Pedom...Plijet ganeoh, Aotrou Jezuz, pa 'z oh meurhed trugarezuz,

delivra dre ho Pasion, an Anaon paour diouz o frizon.

Roit dezo ar Baradoz hag an eternit da repo;

o hasit ganeoh d'ar sklerijenn,

ma 'z aint d'ho kweled da virviken.

Gras d'ar re o-deus poan da veza diboaniet!

D'an Anaon paour da veza pardonet !

Peoh ha gras Doue d'ar re veo !

ha repo vad d'ar re varo , AMEN !

Goude ar maro, e vo gwalhet ar
horv ha lakeet en eul leh deread.
En e gichen e vo dalhet goulou war e-
lum. En e zaouarn e vo lakeet eur groaz.
Demdost e vo dour benniget lag ar re
a zeuy a daolo euz an dour-ze war an
hini maro hag a yelo da zaoulina da
bedi evitañ.